

KANTIK AR BARADOZ

- | | |
|--|--|
| <p>1. Jezuz, pegen bras 've
Plijadur an ene,
Pa vez e gras Doue } <i>bis.</i>
Hag en e garante. }</p> <p>2. Berr 'kavan an amzer
Hag ar poaniou dister,
O sonjal deiz ha noz
E gloar ar baradoz.</p> <p>3. Pa zellan en nenvo,
Etrezek va gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmig wenn.</p> <p>4. Pa vo pred ar maro,
Neuze me 'gimiado
Diouz ar c'hig ankenius,
Enebour da Jezuz.</p> <p>5. Gortoz a ran gant joa
An termen diweza :
Mall am eus da welet
Jezuz va gwir bried.</p> | <p>6. Tremen a rin al loar
Evit pigna d'ar c'hloar ;
Dreist an heol, ar stered,
Me a vezo douget.</p> <p>7. Aet pell diouz an douar,
Traonienn leun a c'hlac'har
Neuze me ray eur zell
Ouz va bro Breiz-Izel.</p> <p>8. D'ezì me lavaro :
Kenavo d'it, va bro !
Kenavo, bed poanius,
Gant da vadou tromplus.</p> <p>9. Doriou ar baradoz
Digor ouz va gortoz,
Ar Zent, ar Zentezed
Deut d'am digemeret.</p> <p>10. Me 'c'hello evit mat
Gwelet Doue an Tad,
Gant e Vab Eternel
Hag ar Spered Santel.</p> |
|--|--|

DA FEIZ HON TADOU KOZ

DISKAN :

*Da feiz hon tadou koz, ni pôtréd Breiz-Izel,
Ni 'zalcho mat ato ;
'Vit feiz hon tadou koz hag en-dro d'he baniel,
Ni holl en em stardo.
Feiz karet hon tadou, morse ni ho mac'ho,
Kentoc'h ni a varvo ! (3 gw.)*

1. D'ar c'hrouadur bihan, e kichenig e gavel,
E lakit eur vamm vat, en deiz evel en noz ;
Er boan bag en ańken, hi a daol buan eur zell
War groaz santel Jezuz, he sońj er baradoz.
2. D'ar pôtr, d'ar plac'h yaouańk, c'houi 'ziskouez hent ar furnez,
C'houi 'lavar : « It gantań hep krena dirak den ;
Bezit, tud yaouańk Breiz, bezit epad ho puhez
Ato gwir gristenien, treitourien birviken ! »
3. D'an den koz gwenn e benn, e korn an tan azezel,
O skuilh daelou a geuz war e amzer genta,
War-lerc'h kalz a hoaniou, c'houi 'lavar, Salver karet,
Er baradoz e vo eńrusted evitań.
4. D'an den diwar ar maez, kenkoulz ha d'an den a vor,
C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato ;
Gouzout a reont en neńv e kavint holl dor zigor :
Ar vuhez 'vo bel fenn ; d'an drubuilh kenavo !